




# CANTIG SANTEZ PHILOMEN, GUERC'HES A MERZERES,

PEINI SO ENORET E ILIS LANDÉVÉNEC,  
TOST D'AR FAOU.

TOUÉE DE L'IMPRIMERIE DE PARIS - P. BOISSARD ET FILS



Var ton Hymn ar Verc'hes : *Quàm pulchrè graditur,  
filia principis.*

†

**G**LOAR ha meuleudi', deoc'h-hu, ô va Jesus,  
Da veza roet d'hor bro en he affliction  
Ur prezant quer precius,  
Un Al-a gonsolation !



O Santes Philomen , en un oat c'hoas quen  
dister

Ec'h estenit ar bed dre'r c'haëra vertuziou !

Grit d'omp olt betec mélver

Querzet bepret var hō roudou !



Ar Brinces yaouanq-ma a voa merc'h da ur  
Roue ,

Abred e reas veu da chom bepret Goerc'hes

A den em rei da Zoue

Evit ar rest eus e buez.



Philomen ne doa quet a veac'h trizec vloas  
fournis ,

Na rancas bizita palès Dioclétien ,

Pini impalaer cris

A bersecute ar gristenien.

e lorned i nant d'or nom de amelise e o  
gouzouz d'auzili un de amelis

**Charmet deus le guenet, an impalaer payen**  
**A bropozas dezi e c'hemer da bried;**

Nan , nan , eme Philomen

**Da Jesus on en em voestet.**

a istud e nant d'or nom de amelise e o  
gouzouz d'auzili un de amelis

**An tyrant estonet a clevet eur seurt refus**  
**E courroucz , e fulor a chench he garantes ,**

**Da bep seurt tourmant scrijus**

**E condaon ractal ar Brinces.**

a istud e nant d'or nom de amelise e o  
gouzouz d'auzili un de amelis

**Var ar plac ec'h ordren e zeuleur en ur**  
**prison ;**

Bourrevien dinatur he zourmant nos ha de ,

**Mes en e affliction**

**Gant ar Verc'hes e consolet.**

a istud e nant d'or nom de amelise e o  
gouzouz d'auzili un de amelis

**Lacat a ra staga un éor ous e gouzouz ,**

**Ac e zeuleur er mor evit beza beuzet,**

**Mes eb an distera droug**

**Gant un Æl e ze delivret.**



Rusia a r'er en tan birou evit e zreuzi ;  
 Mes dre bermision an Doue souveren ,  
 Elec'h treuzi ar Santez ,  
 E teuont da squei ar vourrevien .



Ersin er c'hondaoner evit beza dibennet ;  
 Joayüs e scuill be goad evit lezen Doue :  
 E ene gant an Ælet  
 Zo douguet triomphant en éen !



Enor deoc'h , Philomen , ô Merzeres glorijs ,  
 Curunet a c'hloar e Barados Doue !

Obtenit digant Jesus

Ma er c'harimp ed hor bue .

Princes eus a Balès an Autrou Doue souven-

Rosen gaër a brillant dre ho virginite ,  
 Eneb hon adversourien  
 Preservit hor c'horf, hon éne.



Evit souten ho fei dirac un tyrant cruel ,  
 D'an oad a drizec vloas oc'h eus roet ho pue ;  
 Ni ive , qentoc'h mervel ,  
 Eguet ossanci hon Doue !



Bugale , tud yaouanq , c'houi oll gristenien  
 fervant ,  
 Imitit Philomen bemdez ed ho pue :  
 Eurus ar buguel yaouanq  
 Evedi a servich Doue !



He miraclou zo bras , ho niver zo infinit ,  
 Partout gant meuleudi e comzer anezo ;  
 Bezomp ta recours dezi ,  
 Graçou bras deomp a obteno .



E peb lec'h, e peb bro, he relegou galloudec  
Evel un tensor caër gant prez zo recevet,  
**Brema e LandévéneC**

**Ho mirer ive gant respet.**

Gat Arc'hescop Paris e zoant bet approuvet,  
Dre urs Escop Quemper var un auter neve

E ziot bremal exposet,

**Evit brassa gloar Doue.**



Dar sul varlerc'h Gouel Maria anter-eost,  
Gant solamnité bras e ve gret ar pardon,  
Ac ar gristenien devot  
A zeu de fidia galon.

Hastomp-ta, va Brois, hastomp oll de bizita,  
A dreist oll, tud-à-vor, hi eo ho patronès,

7

Ur Batronès ar vella,  
Deomp oll de fidi assambles.

FIN.

---

### HISTOIRE DU COUVENT

Beza e zeus hoas e ilis Landévéneç , hospen  
relegou Santes Philomen , cals a relegou all ac  
ispicial relegou Sant Guénolé , fondatour a  
kenta abad a gouent Landévéneç , relegou Sant  
Caourintin , patron escopti Kerne , relegou Sant  
Pêr ha Sant Paul , Sant Sébastien , Sant Stephan ,  
Sant Pôl à Léon , Sant Marc , Sant Guinal ,  
Sant Bernard , Sant Malo , etc. , ac un niver bras a  
real . An tenzor caër ha precius-ze a virer goe-  
chal gant cals a respect e couent Landévéneç ;  
saveteet e zint bed dre c'hraç Doue , eb an  
distera droug épâd an amzer trist ac horribl  
eus ar revolution ; an Autrou Escop a Guem-  
per goude beza o bizitet ac o examinet , a  
ordrenas d'an 28 a vis guengolo er bloavez  
1857 , o exposi a neve da veneracion ar giiste-

nien ; a brema e vent douguet bep bloas ac enoret gant un devotion ac ur respet ar vrassa, da zeves pardon Santez Philomon, d'ar zul varlerc'h gouel Maria anter-eost.

---

### PEDEN DA SANT GUÉNOLÉ.

---

Sant Guénolé hon tad carantezus, protegit ac hanomp queit a ma vimp en draonien-ma a zaelou, pedit ac intercedit evidomp var hon heur diveza, ma c'hallimp goude hor maro mont ive d'ar barados da velet, da garet a da veuli Doue assambles ganeoc'h, epad an eter-nite. Evelse bezet gret.

J. P. M. S.